

(7, suite)

Chanson allegoric.

Var ton Jocond.

Al Lapouset genentrez
 O deveus al liberté
 Da nijal partout dre ar vro,
 Ha da gaout société;
 N'en eus qen nemet ar Gaouen,
 Ouneg a zo disprijet;
 Chom a rang en e zoul queren
 Pe verza disoblizet.

(8)

Calz a Gaouenët zo brema,
 Caouenët ar c'his neve,
 Hag a rang tout mont da joucha,
 O doare zo en truez.
 A vec'h en n'ez e credont-hy
 Sortial eus o boden:
 "Biscoaz, emez, n'en eus-ni
 "Guelet ur sort aboden.

(en = eun ?)

" Ma carjemp - ni beza t'c'het
 " Ato diouc'h peb goel ali,
 " Ne vijemp qet brema nec'het
 " O c'houzout peseurt-bati
 " Da g'emeret en asurans,
 " Evit beza dizourzi,
 " Ha bale var douar ar Frans
 " Qen hardis ha pepini.

" An oll lapouzedigou all
 " En em c'hra tout asambles,
 " Neus nemedomp, Caouenët dall,

114

„ Eat da lapouset goez .
 „ Oni'hon a rancomp da gana ,
 „ Ha c'hoaz e ober sioulie ,
 „ Ha c'hoaz e ve en eur grena :
 „ Setu arze hor music . „

(9)

Naren en e chenchamanchou
 A dud a reo lapouset ;
 Brema ar memes burzudou
 Adare zo commanset .
 Meur a hini a voe goechal
 Tud terruyl , var o meno ;
 Brema o deus un hano all :
 Caouennet eo o hano .

(Vol. II, p. 7 - 9.)